

Kantig Itron Varia Gulinenn

DISKAN

*O Gwerc'hez, Itron Gulinenn,
Setu deus ho pugale
Da bedi dirak ho skeudenn :
Ho selaouit hep dale.*

1

C'houi a zo gwir vamm da Jezuz
Ha d'eomp-ni oc'h mamm ive :
Rak-se 'ta bezit truezas
Ouz hor c'horf hag hon ene.

2

Er chapel ken koant, ken brudet,
Savet d'eoc'h gant hou tud koz,
Kendalc'hit, o mamm benniget,
Da skuilh grascu, deiz ha noz.

3

C'houi a zo eur vamm galloudus,
Ni ato prest da vralla ;
Hor buhez a zo hirvoudus :
Deut buan d'hor skoazella.

4

Klanvourien meurbed bourevet,
Arabat fallgaloni :
Louzaouen wella ho klenved
Eo ar bedenn da Vari.

5

Pec'herien oc'h huanadi
Dindan yeo an drouk-spered,
Galvit prim ar Werc'hez Vari,
Ha ganti c'houi vo salvet

6

Aour, arc'hant, perlez prizius,
Tenzoriou eus ar c'haera...
Dirazoc'h, Gwerc'hez dudius,
An traou-ze ne dint netia.

7

'Vit hor bro, koezet ken izel,
O ! pedit, ha pedit c'noaz.
Ma savo, goude ar brezel.
Uhelloc'h eget biskoaz.

8

Pep kristen e Landrevarezeg
Ho karo da virviken,
Hag a vo bemde kalonek
Da bellaat diouz ar vouilhenn.

9

Grit ma vo en hor sperejou
Feiz gwirion eus an dibab ;
Grit ma vo en hor c'halonou
Karante Jezuz ho Mab.

10

Ar garreg e lein ar mene,
An dero 'barz ar c'hoajou,
En desped d'ar barrad kelve,
A jom sounn war o seuliou.

11

N'omp ket tud boazet da blega
Ha da drei gant an avel,
Ha kentoc'h eget 'n em sôtra
Ni 'garfe gwelloc'h mervel.

12

Ni a zo eus ar Vretoned
Hag a stourm enep ar fall ;
En desped d'an holl lamponed
Ni a vevo didammall.

13

Ha pa vezimp en ho kichen,
E splannder ar baradoz,
O ! deoc'h-hu, Itron Gulinenn,
Ni a gano mil bennoz !

BASTIEN.

Imprimatur :

22 a viz Gouere 1941.

Auguste COGNEAU, Ed. aux.